

OLINZER

an

Basion

—

AMZER AR BASION

DEAR MEULEUDIOU

Pennadig - (Yer.11,19) - Deuit, ha lakomp koad en e vara, ha diwriziennomp anezhañ eus douar ar re vev, na vo soñj ken eus e ano.

Neulgan

1. Goude kas da benn an amzer
En doa da ohom en hon touez,
A youl e galon, hor Salver
En em roas d'ar gloazioù,
Da vezañ wavet war ur Groaz,
Gwir Oan sakrifis hor Pask.

4. Gwezenn uhel, pleg da varroù
Evit distan e gorf stenn,
Ha blota da galeter kriz
Da izili hor Roue
Diskennet e deun an anken
Evit daspren an hollved.

2. Vit e sec'hed en deus ar best!
Drein lemm, tachou ha goaf dir
A dreant don e gorf santel,
Ha strink dioutañ gwad ha dour;
O froud n'eo bet gwelc'het gantañ
Douaroù, mor ha stered.

5. Douget ac'h eus, ha te hepken
Gwir paeamant hor pec'hed.
O te hepken, an arc'h aozet
Evit ar bed peñset.
Ha te peurlivet gant ar gwad
A skuilh warnout korf an Oan.

3. O Kroaz illur dreist nep hini,
O, Te, Gwezenn ar splannañ!
N'eus koad ebet 'okhellife dougen
Na deil, na bleunv, na frouezh par.
Prenn dous meurbet, houarnou c'hwek
A bouezh an teñzor dousañ.

6. Klod peurbadel bezet rentet
Deoc'h-c'hwi, Treinded evurus
D'an Tad, d'ar Mab, ha d'ar Spes
Bepred hevelep enor
An holl galonoù d'ho karo,
Hon Doue tri hag unan. Amen.

G/Va dieubit eus va enebourion, a va Doue!
R/Va diwallit ouzh va argaderion.

LETANI

Kirie eleison, Kriste eleison, Kirie eleison
Hon Tad .. (a vez lavaret gant al lider betek)
G/Ha n'hol lezit ket da gouezhañ en tentadur
R/Met hon dieubit eus an droug.
G/Hon adsavit, a Doue an armeadoù:
R/Diskouezit dimp splannder ho tremm ha salvet e vimp.
G/Savit, o Krist, hor skoazellit,
R/Hag hon dieubit en abeg d'hoc'h ano.
G/Hor c'hreñvait, Doue hag a labour ennomp,
R/En abeg d'ho templ a Jeruzalem.
G/Astroù, selacait va fedem
R/Ha ra yelo va garmadenn betek ennoc'h.
G/Ra vo Doue ganeoc'h
R/Ha gant hoc'h ano.

Kenbedenn

DA BRIM. Antif. - Va dieubit, Sotoni, ha va lokit en ho Kich
n'eus feg Jereus felloud e ardo ouzhin me
Lennadenn verr - N'em eus ket distroet va dremm diouzh ar re

DA BRIN

Lennadenn verr - N'em eus ket distroet va dremm diouzh ar re am c'hunujenne hag a dufe ouzhin. Met an Aotrou, an Hollc'halloudeg, en deus va skoazellet, rak-se n'on ket bet mezhekaet. Ha c'hwi, Aotrou, ho pet truez ouzhimp. R/Bennozh da Zoue.

DA DIRS - *Antif. Bannet hoc'h eus, Aotrou, Kev, va ene, difennour va lufy, Aotrou, va Doue*

Pennadig (Yeremia, XVII, 13) - Aotrou, ar holl hag ho tilez, a gavo mezh : ar re a zistro diouzhoc'h a vo skrivet war an douar, rak dilezet o deus mammenn an doureier bev, an Aotrou. R/Bennozh da Zoue

Emrespont-berr - ~~Dieubit xxxxxxxx Doue~~ Eus ar c'hleze, Doue + dieubit va ene (diw wech) G/ Ha va buhez diouzh kraban ar c'hi. Dieubit va ene. Eus ar c'hleze.. G/Aotrou, va salvit eus geol al leon. R/ Ha me reuzeudik eus kerniel ar bualed.

DA SIKS - *Ant. Pollad va jud, fetra' m eus fraet dit, fetra' m eus o zoaniet? Respont din eta*

Pennadig - (Yeremia XVII, 18) - Ra vo mezhekaet va heskinerion, na vin ket mezhekaet-me; + ra grenint, ha na grenin ket me : degasit warno un deiz a walleur, ha torrit anezho a dorridigezh doubl, Aotrou, hon Doue R/Bennozh da Zoue.

Emrespont berr - Eus geol al leon + va salvit, Aotrou (Diw wech) G/ Ha me reuzeudik eus kerniel ar bualed. Va salvit.. Eus geol..

G/ Na zilamit ket va ene gant hini ar bec'herion. R/ Na va buhez gant hini an dud a wad.

DA NON - *Dooust Lag e renter ar dung eil ar mad, f'o deus toulllet ur foz eil va ene*

Pennadig - (Yer. XVIII, 20) - Ho pet soñj ez on en em zalc'he dirazoc'h, da gomz evit o mad ha distreiñ ho konnar diouto.

Emrespont berr - Na zilamit ket va ene, Doue / gant hini ar bec'herion (Diw wech) G/ Na va buhez gant hini an dud a wad. Gant hini ar bec'herion. Na zilamit ..

G/ Va dieubit, Aotrou, eus an den gwall. R/ Va diwallit diouzh an den kriz.

D'AR GOUSPEROU

Pennadig (Yer. II, 20) - C'hwi avat, Aotrou an armeadon, c'hwi a varn gant justis, c'hwi a sont kalon ha lonezi. Ra welin ar veñj a dennfet diouto : rak deoc'h-c'hwi em eus displeget va c'heez, Aotrou va Doue. R/Bennozh da Zoue.

Neulgan

XI

L. Banniel ar Roue a lugern
Ar Groez, m'eo bet meryet warni
Ar Vuhez d'hon savetein
Eus ar maro hag an ifern.

2. Dañl kriñ ar goaf en deus sk
Betek ar berad diwezhan,
Ar gwad-se a felle dezhan
Gwelc'hiñ an dud eus o fec'had

3. Setu bramañ c'hoarvezet mat 5. Eroaz evurus he deus pouezet
Pezh a lare profed Doue, 'Vel ur valañs gant he brankoù
'Teufe ar C'hrist, karour e Dad Ar C'horf a zo priz an dic'haou
Dre prenn ar Groaz da vout Roue Dleet evit daspren ar bed.

4. OGwezenn Sakr ha lugernus 6. O Kroaz, bezit silvidigezh
A sked ruziet gant gwad Jezuz Ar re a gred er Basion,
C'hwi a zougas frouezh ar vuhez Hag a lid e spi ar galon
Kuzhet ennañ pep madelezh. Mister o dieubidigezh.

7. Jezuz a drec'h war ar pec'hed,
Dre nerzh divent ho karantez
Deoc'h, ha d'an Tad, ha d'ar Spered,
Enor en holl beurbadelezh. Amen.

G/Aotrou, va dieubit eus an den gwall.
R/Va diwallit ouzh an den kriz.

LETANI Kirie eleison, Kriste eleison, Kirie eleison
Hon Tad .. (a vez lavaret gant al lider betek :)

G/ Ha n'hol lezit ket da gouezhañ en tentadur
R/ Met hon dieubit eus an droug.

G/ Hon adsavit, a Doue an armeadoù!
R/ Diskouezit dimp splannder ho tremm ha salvet e vimp.

G/ Savit, o Krist, hor skoazellit,
R/ Hag hon dieubit en abeg d'hoc'h ano.

G/ Hor c'hreñvait, Doue hag a labour ennomp,
R/ En abeg d'ho templ a Jeruzalem.

G/ Aotrou, selaouit va fedenn
R/ Ha ra yelo va garmadenn betek ennoc'h

G/ Ra vo Doue ganeoc'h
R/ Ha gant hoc'h ene.

Kenbedenn

SUL AR BASION

GOUEPE OU KRENTAN -

PENNADEG (Hebreez IX, 11-12)

Va breudeur, ar C'hris a zo en en ziskouezet evel Beleg bras ar
madeù da zont. Ha goude tremen dre ur santual brasoc'h ha gwelloc'h,
unan ha n'eo ket diwar dorn andud, da lavarout eo, unan ha n'eo ket
eus ar bed-man, ez eo antreet ur wech evit mat dre e wad e-unan, ha
n'eo ket dre wad bouc'hed ha leueù, e-barzh an neved santelañ, o
vezañ gonezet un dasprenadur'ezh peurbadus. R/ Bennozh da Zoue.

ANULGAN

Panniel ar Roue a lugern
Ar Groaz, m'eo bet marvet warni
Ar Vuhez d'hon saveteif
Eus ar maro hag an ifern.

Taol kriz ar goaf en deus skuilhet
Betek ar berad diwezhañ,
Ar gwad-ge a felle dezhañ
Gwelc'hiñ an dud eus o fec'hed.

Setu bremañ e'hoarvezet mat
Ezhañ a lare profed Doue,
'Teufe ar C'hris, karour e Tad
Dre prena ar Groaz da vout Roue.

O Ewezenn sakr ha lugernus
A sked ruziet gant gwad Jezuz da virvikes.
C'hwi a zougas frouezh ar vuhez
Kuzhet ennañ pep madelezh.

Kroaz evurus he deus pouezet
'Vel ur valañs gant he brankoù
Ar c'horf a zo priz andic'haou
Dleet evit daspren ar bed.

O Kroaz, bezit silvidigezh
Ar re a gred er Basion,
Hag a lid e spi ar galon
Lister o dieubidigezh.

Jezuz a drac'h war ar pec'hed,
Dre nerzh divent he karantez
Deoc'h ha d'an Tad, ha d'ar Spered,
Enor en holl beurbadelezh. Amen.

G/ Va dieubit, Aotrou, eus an den gwall,

R/ Va diwallit diouzh an den kriz.

ANT. d'ar VAGN. He eo an hini a ro testeni diwar va fenn, ha testeni
a ro ivez an Tad en deus va degaset.

KREDEMAZ Teurvezit, Doue helle'halloudek, sellout gant madelezh ouz
tud ho tiegezh, hag en he targentezh gouarnit hor c'horf ha diwar
ho kvarez, diwallit non enezout. ENI ho ped dec J.K.

SUL AR BASION

Nizio ha bremañ betek goude merc'her ar Sizhun Santel, na vez ket lavaret Klod d'an Tad, en holl emrespontoù berr d'ar C'hemplidoù pe d'an eurioù, en ofis ar sul pe war ar sizhun.

D'AR MEULMUDIOU

Antif. 1 - Gwelit, Aotrou, va enkadenn, rak war sav emañ va enebour.

Psalmoù ar Sul

Antif. 2 - E kreiz va zrubuilh am eus galvet an Aotrou, va selaouet en deus, ha va dieubet.

Antif. 3 - Barnet hoc'h eus, Aotrou, kaoz va ene, difenner va buhez, Aotrou, va Doue!

Antif. 4 - O poblad va zud, petra'ta 'm eus graet dit? Gant petra 'm eus da beaniet? Respont 'ta din-me!

~~antif. 5~~

Kentig an tri bugel (Dan. 3, 52-57)

Benniget oc'h, Aotrou, Doue hor geurdadoù
Ha meulus hag uhel-dreist da virviken.

Ha benniget ano santel ho klod,
Ha meulus hag uhel-dreist da virviken.

Benniget oc'h en Templ ho klod santel,
Ha meulus-dreist ha klodus holl da virviken.

Benniget oc'h war dron ho roueelezh
Ha meulus-dreist ha klodus holl da virviken.

Benniget oc'h, e'hwil hag a sell ouzh an islenkoù,
azezet war ar Gerubined
Ha meulus hag uhel-dreist da virviken.

Holl oberenù an Aotrou, benniget an Aotrou,
E veulit hag e glodusait da virviken.

Klod d'an Tad..

Antif. 5 - Daoust hag e renter an droug evit ar mad, p'o deus toulllet ur foz evit va ene

Pennadig - Va breudeur, ar C'hrist a zo en em ziskouezet evel Beleg bras ar madoù da zont. Ha goude tremen dre ur santual brasoc'h ha gwelloc'h, unan ha n'eo ket diwar dorn an dud, da lavaret eo, unan ha n'eo ket eus ar bed-mañ, ez eo antreet ur wech evit mat dre e wad e-unan, ha n'eo ket drowad bous'hed ha leuec'h, e-barzh an neved santelañ, e vezañ gonezet un dasprenadurezh peurbadus. R/Bennoc'h da Zoue.

Meulgan - Goude kaoz da benn.. (Sell. ouzh foliennoù amzer ar Basion)

D'ar Meuleudion

(Meulgan, kemer da c'hortoz hini ar gousperoù) PENNADIG (gw. da DIRS)

ANTIÉ. d'ar BENED. Lavarout a rae Jezuz da engroez ar Yuzevion ha da brised ar veleion. An hini 'zo eus Doue, a selaou komzoù Doue. En abeg da se ne selaout ket, dre n'hoc'h ket eus Doue.

KENBEDENN Teurvezit, Doue helle'halloudek, sellout gant madelezh ouzh tud ho tiegezh, hag en ho largentezh gouarnit hor c'horfob, ha dindan ko kwarez, diwallit hon eneoù. Ni ho ped dfe J.K.

ped dfe J.K.

----- DA BRIM

ANTIÉ Me n'em eus ket un diaoul ennon, met enoriñ a ran va Zad, eme an Aotrou.

----- DA DIRS

ANTIÉ. Me ne glaskan ket va glear-me; un all a zo hag he c'hlas hag a varh.

PENNADIG Va Breudeur: Ar Xt a zo en em ziskouezet evel beleg bras ar madou da zont. Ha goude tremen dre ur santual brasoc'h ha gwelloc'h unan ha n'eo ket diwar dorn an dud, da lavarout eo, unan ha n'eo ket eus ar bed-mañ, ez eo antret ur wech evit mat dre e wad e-unan, ha n'eo ket dre wad bouc'hed ha leueoù, e-barzh an neved santelañ, o vezañ genezet un dasprenadurezh peurbadus. R/ Bemnoz da Zoue.

EMRESPONT Eus ar c'hleze, Doue + dieubit va ene (2 w.) G/ Ha va buhez diouzh kraban ar c'hi. Dieubit... Klod... Dieubit va ene, Doue, eus ar... G/ Aotrou, va salvit eus geol al leon. R/ Ha me reuzedik eus kerniel ar bualed.

----- DA SIKS

ANTIÉ. En gwir, en gwir, a lavaran deoc'h; an nep a viro va c'horzoù n'welo biken ar marc.

PENNADIG (Heb. 9, 13-14) Ha c'hell gwad bouc'hed ha tirvi ha ludu un onner a strinker war ar re santret, santelañ & reiñ ar c'hlianded a gorf, na pegeant muioc'h, gwad ar Wt hag a zo dre ar spered holibadus en em ginniget e-unan profadenn dinama da Zoue, ne c'hlianaio ket ho koustians diouzh an oberoù a varo, na teufet da servijañ an Doue bev

EMRESPONT Eus geol al leon + va salvit Aotrou (2 w.) G/ Ha me reuzedik eus kerniel ar bualed. xmas Va salvit... Klod... Eus geol G/ Na zilañ ket va ene gant hini ar bec'herion. R/ Ha va buhez gant hini an dud a wad.

----- DA NOE

ANTIÉ. euze e kermerjont mein da zarc'hav gant fi; Jezuz avat en em guzhas hag a yeas kuit eus an Templ.

EMRESPONT I. Ha zilañ ket va ene, Doue + gant hini ar bec'herion (2 w.) G/ Na va buhez gant hini an dud a wad. Gant hini... Klod... Na zilañ ket. G/ Va dieubit, Aotrou, eus an den gwall. R/ Va diwallit diouzh an den kris.

PENNADIG Abalaveur da se, hembes eo hasterour un englev nevez, evit teuo ar re a zo bet galvet, ur wech parret dre e varo ar pec'hedo graet dindan an englev kentañ, da reseñ an herez peurbadus pro etat dezho en N.X. hon Aotrou.

D'AN EIL GOUSPEROU

Antif. da gantik Maria - "Abraham, ho tad, a dride gant ar
c'hoantda welout va deiz; gwelet en deus ha karget eo bet
a laouenidigezh".

Kenbedann - Teurvesit, Doue helle'halloudek, sellout gant
madelezh ouzh ho tiegezh, hag en ho largetezh gouarnit hor
c'horfoñ, ha dindan ho kwarez, diwallit hon seneoù. Ni ho
ped dre J.K.

LUN AR BASION

Antif. da gentig Zakaria - D'an deiz bras eus ar gouel + en em zalc'ho Jezuz en e sav, hag e lavare a vouezh kreñv : an nep en deus sec'hed, deuet d'am c'haout, hag evet.

Kenbedenn - Teervezit, Aotrou, santelaat hor yunioù, hag en ho madelezh, reit ho pardon evit hon holl bec'hedoù. Ni ho ped dre J.K.

Antif. da gentig Maria - An nep en deus sec'hed + deuet d'am c'haout hag evet, hag eus e greiz e tiriulho stêrioù dour bev, eme an Aotrou.

Kenbedenn - Reit d'ho pebl, Aotrou, yec'hed ar c'horf hag an ene, ha grit ma 'n en stegimp ouzh an oberoù mat ma tellezimp dre-se bezañ difennet atao gant ho kwarez. Ni ho ped dre J.K.

MEURZH AR BASION

Antif. da gentig Zakaria - Va amzer-me + n'eo ket deuet c'hoazh; hoc'h amzer-c'hwi evet a vez aze da bep mare.

Kenbedenn - Aotrou, ra vo plijus deoc'h ar yunioù a roomp deoc'h ganto digoll evit hor pec'hedoù, ma lakaint ac'hanoomp dellezek eus ho kras, ha ma tennimp gonid eus ho remed peurtadel. Ni ho ped dre J.K.

Antif. da gentig Maria - Pignit c'hwi d'ar gouel-se : + evidon-se ned an ket avat, rak va amzer n'eo ket deuet c'hoazh.

Kenbedenn - Aotrou, reit d'ho servijerion derc'hel a galon d'ober ho youl, 'vit ma kreske en hon deizioù, ken a niver, ken a dalvoudegezh, ar bobl gouestlet d'ho meulendi. Ni ho ped dre J.K.

MERC'HER AR BASION

Antif. da gentig Zakaria - Va deved-me + a glav va mouezh : ha me, an Aotrou, anavez anezho.

Kenbedenn - Goude santelaat ar yun-mañ, a Doue, eklerijennit en ho truez, kalon ho fideled, ha d'ar re a reit dezho deoñs c'hredus, digorit d'o fedenn ho tiwskouarn trugarezus. Ni ho ped dre J.K.

Antif. da gentig Maria - Oberoù mat e-leiz + an eus graet en ho kenver : evit pehini anezho e fell deoc'h va lashañ?

Kenbedenn - Doue hollie'halloudek, taolit evezh ouzh hon daspede neu ha d'ar re a reit dezho esperiñ ganta fizieñs en ho truez, reit gant madelezh kaout efed ho trugarez kustum. Ni ho ped dre J.K.

YAC'H AR BASION

Antif. da gentig Zakaria - A, Mestr a lavar dit : fost emañ va amzer ober a rin ar Pask duze gant va diskibion.

Kenbedenn - Doue hollc'halloudek, roit d'non natur-den gloazet he stumm gent an diroll, adkaout he meurded war-bouez remed yac'huz an ensiouer gredus. Ni ho ped dre J.K.

Antif. da santig Maria - G'hoantaat em aus a c'hoant bras + debriñ ar Pesk-mañ ganeoc'h, arack gouzañv poan.

Kenbedenn - Aotrou, bezit trugarezus e-keñver ho pobl, ha grit mac'h argasing ar pesk na blij ket deoc'h evit teñva kentoc'h levezet leun ho kourc'hemennoù. Ni ho ped dre J.K.

D'AR GERNER

Antif. da santig Zakaria - Fostaat a rae avat + deiz gouel ar Yuzevion; hag e klaske priñsed ar veleion penaos lazhañ Jezuz, met aon o devoa rak ar bobl.

Kenbedenn - Skuilhit ho kras en hor e'halon gant madelezh, Aotrou, hag hol lekit da gastizañ a youl-kaer hon drouk-c'hoantegezhioù, ma kavimp gwel gouzañv poan amzerel eget bezañ kondaonet d'ar gwanerezh paurbadel. Ni ho ped dre J.K.

Antif. da santig Maria - Priñsed ar veleion + e reas musul da lazhañ Jezuz : nemet e lavarent : arabet na vefe e-pad ar gouel, gent aon na savfe touennoc'h e-touez ar bobl.

Kenbedenn - Klask a reomp gras ho kwarez : gretait dimp, Doue hollc'halloudek, ma vezimp dieubet dioc'ho pep droug, evit ho servijout gant ur galon asur. Ni ho ped dre J.K.

SIZHUS AR BASION

Antif. da santig Zakaria - Re glear din-me, Tad + ez kichen, gant ar c'hloar em bea ez kichen, arack ma vije bet krouet ar bed.

Kenbedenn - Roit, Aotrou, d'ar bobl 'zo gouestlet deoc'h, kreskiñ bepred en hec'h akad d'ho servijout, hag o kaout hor e'helenn eg ober eakr ho liderezh, re reseviap seul vuioù a c'hrasoù digant ho madelezh, ma plijimp muioc'h d'ho meurdez. Ni ho ped dre J.K.

Gouarnerezh Kentañ

Antifonennoù ha psalmoù ar Sadorn

Pennadig (Filip 2, 5-7) - Breudeur, ho pet an hevelep menozioù hag ar C'hrist Jezuz. Rak evitañ da vezañ en furn Doue n'en deus ket sellot e gevalded gant Doue evel tra da virout gant pizhoni; met en em izelaet en deus dre gemer furn ur sklav ha dre en em ober hañval ouzh an dud. R/ Bennozh da Zoue.

MENEGAN

1
Banniel ar Roue a lugern
Ar Groaz, m'eo bet maryllet warni
Ar Vuhez d'hon saveteiñ
Eus ar mare hag an ifern.

4
O Gwezenn sakr ha lugernus
A sked ruziet gant gwad Jezuz
C'hwi a zougas frouezh ar vuhez
Kuzhet ennañ pep madelezh.

2
Taol kriz ar Roaf en deus skuilhet
Betek ar berad diwezhañ,
Ar gwad-se a felle dezhañ
Gwelc'hiñ an dud eus o fec'hed.

5
Kroaz evurus he deus pouezet
'Vel ur valañs gant he brankoù
Ar c'horf a zo priz an die'haou
Dleet evit daspren ar bed.

3
Setu bremañ c'hoarvezet mat
Pezh a lavé profed Doue,
'Teufe ar C'hrist, karour e Dad
Dre prena ar Groaz da vont Roue.

6
O Kroaz, bezit silvidigezh
Ar re a gred er Basion,
Hag a lid e spi ar galon
Mister o dieubidigezh.

7
Jezuz a drec'h war ar pec'hed,
Dre nerzh divent he karantez
Deoc'h ha d'an Tad, ha d'ar Spered,
Enor en holl beurbadelezh. Amen.

G/ Aotrou, va dieubit eus an den gwall.
R/ Va diwallit ouzh an den krizh.

Antif. da Gantig Maria - O Tad reizh + ar bed n'hoc'h anav ket; me avat hoc'h anav, dre m'hoc'h eus va c'haset.

Kenbedenn - Doue ghollc'halloudek ha peurbadel, c'hwi hag hoc'h eus roet da Vab den ur skouer a izelegezh da heul, dre zegas hor salver da gemer ur c'horf ha da c'houzav dismegañs ar Groaz, grit a'hor be bepred dirak hor sell kentel e basianted, ma telleziap bezañ kenled ivez en e zasoec'h. Ni ho ped dre J.K.

D'AR BLEUNIOU

Antif. 1 - Va skeazeller + eo an Aotrou Doue : ha gnt se na vin ket mezheket.

Psalmoù ar Sul

Antif. 2 - Va grommet o deus + evel gwenan : met en ano an Aotrou e vrevin anezho.

Antif. 3 - Barnit va c'haez, + va difennit, rak galloudek ez oc'h, Aotrou.

Antif. 4 - Gant an Aeled hag ar vugale, + ra vimp kavet feal, o youc'h al da drec'hour ar maro : Hosanna war al laezioù.

Kantik an tri bugal (Dan. 3, 52-57)

Benniget oc'h, Aotrou, Doue hor gourdadou
Ha meulus hag uhel-dreist da virviken.

Ha benniget ano santel ho kled,
Ha meulus hag uhel-dreist da virviken.

Benniget oc'h en Templ ho kled santel,
Ha meulus-dreist ha kledus holl da virviken.

Benniget oc'h war droun ho roueelezh
Ha meulus-dreist ha kledus holl da virviken.

Benniget oc'h, e'hwil hag a sell ouzh an islonkou, azezet
war ar Gerabined,
Ha meulus hag uhel-dreist da virviken.

Holl oberou an Aotrou, benniget an Aotrou,
E veulit hag e gledusait da virviken.

Kled d'an Tad ...

Antif. 5 - Ra vo mezhekaet + ar re hag am heskin, ha na vin ket a mezhekaet-me, Aotrou, va Doue.

Pennadig - (Filip. 2, 5-7) - Breudeur ! ho pet an hevelep menozioù
hag ar G'hris Jezuz : rak evitañ da vezañ en furn Doue, n'en deus
ket sellet e gevatalded gant Doue evel tira da virout gant pizhoni,
met en izelaet en deus dre gemer furn ur sklav ha dre en em ober
hanval ouzh an dud. R/ Bennozh da Zoue.

MEULGAN

- | | |
|---|---|
| 1. Coude kas da benn an amzer
En doa da chom en hon touez,
A youl e galon, hor Salver
En em roas d'ar gleazioù,
Da vezañ savet war ur Groaz,
Gwir oan sakrifikis hor Paek. | 3. O Kroaz illur dreist nep hini,
O, Te, gwezenn ar splannañ!
N'eus kead ebet 'c'hellfe dougen
Ha deil, na bleuñv, na frouezh par.
Prenn dous meur'bet, houarnou c'hwek
A frouezh an teñzer douasañ. |
| 2. 'Vit e seo'hed, en deus ar best!
Drein lemm, tachoù ha goafz dir
A dreant don e gorf santel,
Ha strink dioutañ gwad ha dour :
O froud m'eo bet gwelc'het gantañ
Douarou, mor ha stered. | 4. Gwezenn uhel, pleg da varrou
Evit distan e gorf stenn,
Ha plota da galeter kriz
Da izili hor Roue
Diskennet e deun an anken
Evit daspren an hollved. |

5. Douget ac'h eus, ha te hepken, Gwir paeamant hor pec'hed.
 O te hepken, an arc'h aozet
 Evit ar bed peñseet.
 Ha te peurlivet gant ar gwad
 A skuilh warnout korf an Gan.

6. Klod peurbadel bezet rentet
 Deoc'h-c'hwi, Treinded evurus,
 D'an Tad, d'ar Mab, ha d'ar Spered,
 Bepred hevelep enor
 An holl galenoù d'ho karo,
 Hon Doue tri hag unan. Amen.

G/ Va dieubit eus va enebourion, a va Doue?

R/ Va diwallit ouzh va argaderion.

Antif. da gantik Zakaria - An engroez tud + deredet evit an deiz
 gouel, a youc'he d'an Aotrou : Benniget an hini a zeu en ano an
 Aotrou, hosanna war al laezioù.

Kenbedenn - Doue hollc'halloudek ha peurbadel, c'hwi hag hoc'h eus
 roet da Vab den ur skouer a izelegezh da heul, dre zegas hor salver da
 gemer ur c'horf ha da c'houzañv dismegañs ar Groaz, grit m'hor bo
 bepred mirek hor sell kentel e basianted, ma tellezimp bezañ kenlod
 ivez en e zaserc'h. Ni ho ped dre J.K.

DA BRIN

Antif. Bugale an Hebreed, + o tougen skourroù olivez a ziambroutas an
 Aotrou, o youc'hal d'e veuleudi : Hosanna war al laezioù.

LENNADENN VERR - (Filip. 2, 10-11) Evit ma plege/en ano Jezuz, pep
 glin en nenv, war an douar, hag en ifernioù, hag evit ma embanno
 pep teod da glod Doue an Tad, ez eo Jezuz Krist an Aotrou. Ha c'hwi,
 Aotrou, ho pet truez ouzhimp.

DA BIRS

Antif. - Bugale an Hebreed, + a astenne o dilhad war an hent, hag a
 youc'he d'e veuliñ : Hosanna da vab David, benniget an hini a zeu
 en ano Doue.

Pennadig - (Filip, 2, 25-7) Breudeur : ho pet an hevelep menegi oñ
 hag ar C'hrist Jezuz : rak evitañ da vezañ en furn Doue n'en deus ket
 sellet e gevatalded gant Doue evel tra da virout gant pizhoni, met
 en em izelaet en deus dre gemer furn ur sklav ha dre en em ober
 hañval ouzh an dud. R/Bennozh da Zeue.

Erespont berr - Eus ar c'hleze, Doue + dieubit va ene. (Diw wech).

G/ Ha va buhez diouzh kraban ar c'hi. Dieubit va ene. Eus ar c'hleze
 Doue, dieubit va ene.

G/ Eus geol al leon va dieubit, Aotrou.

R/ Ha me renzeudik, eus kerniel ar bualed.

DA SIKS

Antif. - Deoc'h-c'hwi + em eus displeget va c'haez, Aotrou, c'hwi
 difenner va buhez, Aotrou, va Doue.

Pennadig - (Filip, 2, 8-9) - Hag anavezet evelse dindañ diavaezoù un
 den, en em izelaas c'hoazh dre en em ober sentus betek ar mare, ha
 zoken betek mare ar Groaz. Hag en abeg da 'se, en deus Doue uhelaet
 anezhañ dreist hini ha roet dezhañ un ano dreist pep ano.

Emrespont berr - Eus geol al leon + va dieubit, Aotrou. Eus geol..
G/ Hax me reuzedik eus kerniel ar bualed. Va dieubit Aotrou. Eus
geol al leon ...

G/ Na zilamit ket va ene gant hini ar bec'herion.
R/ Na va buhez gant hini an dud a wad.

DA NON

antif. - Daspediñ a rin + hoc'h ano, a Aotrou, na zistroit ket ho
tremm dalc'hozh va garmadenn.

Pennadig - (Filip. 2, 10-11) - Evit ma plego en ano Jezuz, pep
glin en neñv, hax war an douar, hag en ifernioù, hag evit ma embanne
pep teod da glod Doue an Tad, ez eo Jezuz Krist an Aotrou.

Emrespont berr - Na zilamit ket va ene + gant hini ar bec'herion.
(Diw wech). G/ Na va buhez gant hini an dud a wad. Gant hini ar
bec'herion. Na zilamit ...

G/ Aotrou, va dieubit eus an den gwall
R/ Va diwallit ouzh an den krizh.

D'AR GOUSPEROU

Evel er gousperoù kentañ nemet :

Antifonenoù ha Psalmoù ar Sul

Antif. da Gantik Maria - Skrivet eo avat : + skeiñ a rin ouzh ar
mesaer ha dastrewet e vo an deñved. Met goude ma vin dasorc'het
endro, ez in en ho rack en Galilea : eno am gwelfot, eme an Aotrou.

----- DA SON

antif. - Daspediñ a rin hoc'h ano, a Aotrou, na zistroit ket ho
tremm dalc'hozh va garmadenn.

Pennadig - (Filip. 2, 10-11) - Evit ma plego en ano Jezuz, pep
glin en neñv, hax war an douar, hag en ifernioù, hag evit ma embanne
pep teod da glod Doue an Tad, ez eo Jezuz Krist an Aotrou.

----- DA SON

antif. - Daspediñ a rin hoc'h ano, a Aotrou, na zistroit ket ho
tremm dalc'hozh va garmadenn.

Pennadig - (Filip. 2, 10-11) - Evit ma plego en ano Jezuz, pep
glin en neñv, hax war an douar, hag en ifernioù, hag evit ma embanne
pep teod da glod Doue an Tad, ez eo Jezuz Krist an Aotrou.

antif. - Daspediñ a rin hoc'h ano, a Aotrou, na zistroit ket ho
tremm dalc'hozh va garmadenn.

SUL AR BLEUNIOU

GOUSPEROU KENTAN

PENN ADIG (Filip 2,5-7) Va breudeur, Ho pet an hevelep menozion hag ar C'hrist Jezuz. Rak evitañ da vezañ en furn Doue n'en deus ket sellet e genatalded gant Doue evel tra da virout gant pizhoni; met en em izelaet en deus dre gemer furn ur sklav ha dre en em ober hañval ouzh an dud / R/ Bennozh da Zoue .

eulgan ha gwerzad (Gw. ex Sul ar Basion)

ANTIF. d'ar Magn. O Tad reizh, ar bed n'hoc'h anav ket; me avat hoc'h anav, dre n'hoc'h eus va c'haset .

KENBEDENE Doue hollc'halloudek ha peurbadus, C'hwi hag hoc'h eus desket an izelegezh da Vab-den, dre lakaat hor Salver da gemer ur c'horf ha da c'houzañv dismegans ar Groaz, roit dimp ar c'hras da hauilh kentel e basianted, ma tellezimp bezañ kenlod gantañ en e zasorc'h. Ni ho ped dre an hevelep J.K.

D'AR NEULEUDI OU

Pennadig ha eulgan evel uheloc'h .

ANTIF. An engroez tud deredet evit an deiz gouel, a youc'he d'an Aotrou; Benniget an hini a zeu en ano an Aotrou, Hosanna war allaezion.

-DA BRIM

ANTIF. Bugale an Hebreed, o kemer skourroñ Olived, a ziambrougas an Aotrou, o youc'hal d'e veuleudi: Hosanna war al laezion.

DA DIRS

ANTIF. Bugale an Hebreed a astenne o dilhad war an hent, hag a youc'he d'e veuliñ : Hosanna da Vab David, benniget an Hini a zeu en ano Doue.

Pennadig evel uheloc'h EMRESPONT evel e Sul ar Basion (hep Gloria)

DA SIKS

ANTIF. Deoc'h-C'hwil 'm eus displeget va c'haez, a Aotrou, C'hwi difenner va buhez, Aotrou, va Doue .

PENNADIG (Filip. 2,8-9) Hag anavezet evelse dindan diavaezon an den, en em izelaas c'hoazh dre en em ober sent a betek ar maro ha zoken betek maro ar Groaz, Hag en askont da se en deus Doue uhelaet anezhañ dreist-hini, ha roet dezhañ un ano a zo dreist pep ano. R/ B. da Zoue

DA NON

ANTIF. Daspediñ a rin hoc'h ano, A Aotrou; na zistroit ket ho trec'h diouzh va gannadenn.

PENNADIG (Filip. 2,10-11) En ano Jezuz, ra blege pep glin en neñv, war an douar hag en ifernioñ, ha ra embanno pep teod da glod Doue an Tad, ez eo Jezuz Krist an Aotrou. R/ Bennozh da Zoue.

D'ar Gousperou

ANTIF. Skrivet eo avat; Skeiñ a rin ouzh ar maezer & dastrewet e vo an denved; met goude eo vin dasorc'het endro, ez in en ho rack en Galilea. Eno an gwelfot, eme an Aotrou.

LUN AR SIZHUN SANTEL

D'AR NEULMUDIOU

Antif. 1 - N'e'm eus ket distroet + va dremm diouzh ar re am c'hunujenne hag a dufe ouzhin.

Psalmoù al lun

Antif. 2 - Kleze, + dihun a-enep ar re a zispenn va zropell.

Antif. 3 - Prizachet o deus + va gwerzh tregont pezh arc'hant; setu petra on bet kontet ganto.

Antif. 4 - Beuzet e oan + dindañ an dourioù. Lavaret em eus : kollet onk; pedin a rin hoc'h ano, Aotrou Doue.

Kantik Isahia (12, 1-6)

Grasoù a rentan deoc'h, Aotrou, rak konnaret e oac'h em enep
Met distroet eo ho prouez, ha va frealzet hoc'h eus

Setu: Doue eo va silvidigezh;

Fizaañs am bezo, ha n'em bo ket aon

Rak va nerzh ha va c'hreñvder eo an Aotrou

En 'zo bet din ur salver

Tennañ a refot dour gant joa,

Eus mammennoù ar silvidigezh.

Hag e lavarfet en deiz-se:

Rentit grasoù d'an Aotrou, ha youc'hit d'e ano.

Embannit e-touez ar pobloù braster e oberoù

Degemennit ez eo holl-uhel e ano.

Psalm d'an Aotrou, dre m'en deus graet traoù klodus,

Ra vo anavezet se gant an douar a-bezh!

Youc'hit ha kanit gant levenez, c'hwi annezerion Sion!

Rak bras eo en ho kreiz Sant Israel!

Klod d'an Tad ..

Antif.5 - Gwelit + komzoù ha soñjoù va argaderion, Aotrou!

Pennadig (Yer. 11, 19)

Deuit ha lakomp koad en e vara, ha diwriziennomp anezhañ eus douar ar re vev, na vo ken soñj ken eus e ano.

NEULGAN

1. Goude kas da benn an amzer
En doa da chom en hon touez,
A youl e galon, hor Salver
En em roas d'ar gloazioù,
Da vezañ savet war ur Groaz,
Gwir Oan sakrifis hor Pask.

3. O Kroaz illur dreist nep hini,
O Te, gwezenn ar splannañ!
N'eus koad ebet c'hellfe dougen
Na deil, na bleuñv, na frouezh par
Prenn dous meurbet, houarnoù c'hwek
A frouezh an teñzor dousañ

2. Vit e sec'hed en deus ar best!
Drein lemm, taohoù ha goaf dir
A dreant don e gorf santel,
Ma strink dioutañ gwad ha dour:
O froud m'eo bet gwelc'het gantañ
Douaroù, mor ha stered.

4. Gwezenn uhel, pleg da varroù
Evit distan e gorf stenn,
Ha blota da galeter kriz
Da izili hor Roue
Diskennet e deun an anken
Evit daspren an hollved.

5. Douget eo'h eus, ha te hepken, 6. Klod peurbadel bezet rentet
Deoc'h-c'hwi, Treinded evurus,
Gwir paeamant hor pee'hed. D'an Tad, d'ar Mab ha d'ar Spered,
O te hepken, an arc'h aozet Bepred hevelep enor
Evit ar bed peñseet. An holl galonoù d'ho karo,
Ha te peurlivet gant ar gwad Hon Doue tri hag unan. Amen.
A skuilh warnout korf an Oan.

G/ Va dieubit eus va enebourion, a va Doue!

R/ Va diwallit ouzh va argaderion.

Antif. da Gantik Zakaria - Ro klod din-me, o Tad, ez kichen-te, ar
c'hlod-se hag am boa, arack ma oa krouet ar bed.

Letani - Kirie eleison, Kriste eleison, kirie eleison.
Hon Tad .. (a vez lavaret gant al lider betek :)

G/ Ha n'hol lezit ket da gouezhañ en tentadur.

R/ Met hon dieubit eus an droug.

G/ Hon adsavit, a Doue an armeadoù!

R/ Diskouezit dimp splannder ho tremm ha salvet e vimp.

G/ Savit, o Krist, hor skoazellit,

R/ Hag hon dieubit en abeg d'hoc'h ano.

G/ Hor c'hrenvait, Doue hag a labour ennomp,

R/ En abeg d'ho templ a Jeruzalem.

G/ Aotrou, selaouit va fedenn

R/ Ha ra yelo va garmadenn betek ennoc'h.

G/ Ra vo Doue ganeoc'h

R/ Ha gant hoc'h ene.

Kenbedenn - Pedomp. Doue hollc'halloudek, n'omp ket evit derc'hel
en abeg d'hor gwanded dindañ kement all a reuzioù, teurvezit
reñ dimp eta dre veritoù Pasion ho Mab unel, ma c'hellimp
alanat disammet. Ni ho ped dre J.K.

DA BRIM

Antif. N'em eus ket distroet + va dremm diouzh ar re am c'hunujenne
hag a dufe ouzhin.

LENNADENN VERR - N'em eus ket distroet va dremm diouzh ar re am
c'hunujenne hag a dufe ouzhin. Met an Aotrou, an Hollc'halloudeg en
deus va skoazellit, rak-se n'onk ket bet mezhekaet. Ha c'hwi, Aotrou,
ho pet truez ouzhimp. R/ Bennozh da Zoue.

DA DIRS

Antif. - Kleze, + dihun a-enep ar re a zispenn va zropell.

DA SIKS

Antif. - Prizachet o deus + va gwerzh tregont pezh arc'hant; setu
petra on bet kontet ganto.

DA NON

Antif. - Gwelit + komzoù ha soñjoù va argaderion, Aotrou!

Rikar

D'AR GOUSPEROU

Antifonennoù ha psalmoù en deiz

Pennadig (Yer. II, 20) C'hwi avat, Aotrou an armeadoù, o'hwi a warn gant justis, c'hwi a sont kalon ha lonezi. Ra welin ar veñjañs a dennfet diouto : rak deoc'h-c'hwi em eus displeget va c'haaz, Aotrou, va Doue.

MEULGAN

- | | |
|---|--|
| 1. Banniel ar Roue a lugern
Ar groaz, m'eo bet marvet warni
Ar vuhez d'hon saveteiñ
Eus ar maro hag an ifern. | 4. O Gwezenn sakr ha lugernus
A sked ruziet gant gwad Jezuz
C'hwi a zougas frouezh ar vuhez
Kuzhet ennañ pep m'adelezh. |
| 2. Taol kriz ar goaf en deus skuilhet
Betek ar berad diwezhañ,
Ar gwad-se a felle dezhañ
Gwelc'hiñ an dud eus o fec'hed. | 5. Kroaz evurus he deus pouezet
'Vel ur valañs gant he brankoù
Ar c'horf a zo priz an dic'haou
Dleet evit daspren ar bed. |
| 3. Setu bremañ c'hoarvezet mat
Pezh a lare profed Doue,
'Teufe ar C'hrist, karour e Dad
Dre prenn ar Groaz da vout Roue. | 6. O Kroaz, bezit silvidigezh
Ar re a gred er Basion,
Hag a lid e spi ar galon
Mister o dieubidigezh. |
| | 7. Jezuz a drec'h war ar pec'hed,
Dre nerzh divent ho karantez
Deoc'h ha d'an Tad, ha d'ar Spered,
Enor en holl beurbadelezh. Amen. |

G/ Aotrou, va dieubit eus den gwall.
R/ Va diwallit ouzh an den kriz.

Antif. da Gantik Maria - N'az pefe + galloud ebet warnon, mar ne vefe ket bet roet dit eus krec'h.

Letani - Kirie eleison, Kriste eleison, Kirie eleison
Hon Tad ...

G/ Ha n'hol lezit ket da gouezhañ en tentadur
R/ Met hon dieubit eus an droug.

G/ Hon adsavit, a Doue an armeadoù?
R/ Diskouezit dimp splannder ho tremm ha salvet e vimp.

G/ Savit, o Krist, hor skoazellit,
R/ Hag hon dieubit en abeg d'hoc'h ano

G/ Hor c'hrenvait, Doue hag a labour ennoep
R/ En abeg d'ho templ a Jeruzalem.

G/ Aotrou, selaouit va fedenn
R/ Ha ra yelo va garmadenn betek ennoc'h.

G/ Ra vo Doue ganeoc'h
R/ Ha gant hoc'h ene.

Kenbedenn - Hor skoazellit, Doue, hor silvidigezh : hag hol lakit d'en em gant gant levezet en deizioù-se a enforimp ganto ar madelezhioù hoc'h eus teurvezet hon adstummañ ganto. Ni ho ped dre J.KK

MEURZH AR SIZHUN SANTEL

D'AR NEULLEUDIOU

Antif. 1 - Sellit, Aotrou + ha gwelit ez on gwall-drubuilhet : hastit d'am selaou.

Psalmoù ar Meurzh

Antif. 2 - Difennit va c'haoz, + Aotrou : va dieubit diouzh an den gaouiat ha fall

Antif. 3 - War du an Aotrou + am eus garmet em zrubuilh eus don an ifern, ha va selaouet en deus.

Antif. 4 - A Aotrou + , poan a ziwaskan, komzit em lec'h, rak n'ouzon petra respont d'am enebourion.

Kantik G'hizkia

Lavaret em eus : E kreiz va deizioù, e rankan mont war-du perzhier bro ar maro,

Lamet diganin ar peurrest eus va bloavezhioù.

Lavaret em eus : ne welin mui an Aotrou en douar ar re vev,
Ne welin den ebet ken e-touez annezerioh an douar.

Dispennet eo va chomlec'h ha tennet diouzhin
Evel teltenn ur mesaer.

Rollet em eus va buhez evel ma ra ar gwiader :
Va zroc'hañ a reer diouzh ar stern.
Va bourreviañ a rit deiz ha noz.

~~Rifal~~ ~~garmin~~ a ran betek ar mintin,
Evel pa vefe ul leon o terriñ din va holl eskern :
Va bourreviañ a rit deiz ha noz.

Rifal a ran evel ar wennol,
Hirvoudiñ a ran evel ar goulm.

Skuizh eo va daoulagad dre hirsellout ouzh krec'h
A Aotrou! poan a ziwaskan, bezit va skoazell.

Petra lavarinn : rak eñ en deus komzet din,
Ha graet en deus e-unan em c'hoñver.

Kas a rin da benn va holl vloavezhioù,
Trec'het ganin enkreiz va ene.

XX Ar re warezet gant an Aotrou, ar re-se a vev,
Hag en o zouez e kasin da benn buhez va spered!
XXXXX Va yac'haet hoc'h eus ha miret en buhez.

Setu, kemmet en deus en peoc'h va gwall-anken,
Rak c'hwi hoc'h eus diwallet va ene diouzh poull ar maro,
Taolet hoc'h eus a drek d'ho kein va holl bec'hedoù.

Rak an ifern n'ho kan ket, nag ar maro n'ho meul ket,
Ar re a ziskenn er poull-bez n'esperont ken en ho fealded.

An hini bev, an hini bev, en ho meulo evel ma ran hizio :
An Tad a roie da kanaout ho fealded d'e vugale.

An Aotrou eo va salver : ha ni a gano va c'hanennoù
A-hed holl zeizioù hor buhez en ti an Aotrou

Antif. 4 - A Aotrou +, poan a zivaskan, komzit em lec'h, rak
XXXXX n'ouzon petra respont d'am enebourion.

Antif. 5 - Lavaret o deus ar re fall : Gwakomp an den reizh, o
vezan maz eo kontrol d'hon oberoù.

Pennadig, meulgan ha gwerzad amzer ar Basion (cf. ofis amzer ar
Basion, war ar sizhun).

Antif. da Gantik Zakaria - Araok deiz gouel ar Pask, + Jezuz o
c'houzout e oa deuet e eurz, goude bezañ karet e re, o c'haras
betek ar penn.

Kenbedenn - Doue hollc'halloudek ha peurbadus, hol lakit da lidañ
misterioù Pasion an Aotrou, en doare ma tellezimp resev gras ho
pardon. Ni ho ped dre J.K.

D'AN EURIOU BIHAN - Antifonenoù ar meuleudioù
Pennadig hag Emrespont-berr amzer ar Basion

D'AR GOUSPEROU

Antif. ha psalmoù an deiz

Pennadig, Meulgan ha gwezzad amzer ar Basion

Antif. da Gantik Maria - Galloud em eus da zilezel va buhez ha
d'hec'h adkemer endro.

Kenbedenn - Ho trugarez, o Doue! da skarzho diouzhimp kement se
restaj a chom kush ennomp eus kozhni hon natur, ha'n hol lakaio
digor da resev ez leun ho nevezder santel. Ni ho ped dre J.K.

MERC'HER SANTEL

D'AR MEULUDIOU

Antif. 1 - Va dieubit eus ar gwad skuilhet, + Doue, va Doue, ma youc'ho va zeed d'ho reizhder.

Psalmoù an deiz

Antif. 2 - Kunujennoù ha spouronoù + am eus gouzañvet eus o ferzh; met ganin emañ an Aotrou, evel ur brezelour nerzhus.

Antif. 3 - C'hwi avat, Aotrou, + c'hwi 'car o holl iriennoù d'am lakaat da vervel.

Antif. 4 - Va holl enebourion + o deus klevet komz eus va gwalleurioù, Aotrou; levezet o deus bet, dre m'hoc'h eus graet se.

Kantik Anna - (I Sam. 2, 1-10)

Va c'h'halon a drid en Aotrou :
Nerzh hag adsav a gavan em Doue.

Bras e tigoran va genoù a-enep va enebourion,
Dre ma 'n em laouenaan en abeg d'ho skoazell.

N'eus hini a ve santel evel an Aotrou,
N'eus Doue all ebet, etr egedoc'h,
N'eus roc'h ebet heñvel ouzh hon Doue.

Na vrabañsit ket en ho komzoù lorc'hus
Na lezit ket ho kenoù da vont d'ar regoni,

Rak an Aotrou eo un Doue a car pep tra :
Eñ an hini a bouezh an oberoù.

Setu torret gwareg ar c'halloudeion,
Sed ar re wan gourizet a nerzh!

Ar re o devoa o gwalc'h en em c'hopra evit o vara,
Hag ar re naoniet a baouez a labourat.

An hini c'haonac'h he deus bugel seiz gwech,
Hag e tizeri en hini he devoa lies a vugale.

An Aotrou a ro ha mare ha buhez,
Kas a ra d'an ifernioù ha tennañ a ra dicuto.

An Aotrou a lak an dud da baouraat ha da binvidikaat
O izelaat hag o uhelaat a ra

Eus ar poultr ec'h adsav ar paour,
Eus en teil e tenn ar reuzeudik,

Evit e lakaat da goazezañ e-touez ar briñsed
Evit grataat dezhañ ur gador a glod.

Rak an Aotrou eo perc'henn kolonenoù an douar
Warno en deus stabilaet ar bed.

Diwall a ra kammedoù e señt,
Ar re fall avat a ya da goll en teñvalderioù.

MERC'HER SANTEL

D'AR MEULEUDICOU

Antif. 1 - Va dieubit eus ar gwad skuilhet, + Doue, va Doue, ma youc'ho va zeed d'ho reizhder.

Psalmoù an deiz

Antif. 2 - Kunujennoù ha spouronoù + am eus gouzañvet eus o ferzh; met ganin emañ an Aotroù, evel ur brezelour nerzhus.

Antif. 3 - C'hwi avat, Aotroù, + c'hwi 'oar o holl iriennoù d'am lakaat da vervel.

Antif. 4 - Va holl enebourion + o deus klevet komz eus va gwalleurioù, Aotroù; levenez o deus bet, dre m'hoc'h eus graet se.

Kantik Anna - (I Sam. 2, 1-10)

Va ch'halon a drid en Aotroù :
Nerzh hag adsav a gavan em Doue.

Bras e tigoran va genoù a-enep va enebourion,
Dre ma 'n em laouenaan en abeg d'ho skoazell.

N'eus hini a ve santel evel an Aotroù,
N'eus Doue all ebet etr egedoc'h,
N'eus roc'h ebet heñvel ouzh hon Doue.

Na vrabañsit ket en ho komzoù lore'hus
Na lezit ket ho kenoù da vont d'ar rogoni,

Rak an Aotroù eo un Doue a oar pep tra :
En an hini a bouezh an oberoù.

Setu torret gwareg ar c'halloudeion,
Sed ar re wan gourizet a nerzh!

Ar re o devoa o gwalc'h en em c'hopra evit o vara,
Hag ar re naoniet a baouez a labourat.

An hini c'haonac'h he deus bugel seiz gwech,
Hag e tizeri en hini he devoa lies a vugale.

An Aotroù a ro ha maro ha buhez,
Kas a ra d'an ifernioù ha tennañ a ra diuto.

An Aotroù a lak an dud da baouraat ha da binvidikaat
O izelaat hag o uhelaat a ra

Eus ar poultr ec'h adsav ar paour,
Eus en teil e tenn ar reuzeudik,

Evit e lakaat da goazezañ e-touez ar briñsed
Evit grataat dezhañ ur gador a glod.

Rak an Aotroù eo perc'henn kolonenoù an douar
Warno en deus stabilaet ar bed.

Diwall a ra kammedoù e sent,
Ar re fall avat a ya da goll en teñvalderioù.

N'eo ket en askont d'e nerzh e vefe kreñv an den :
An Aotrou eo an hini a vreve an enebourion.

Mus lein an neñv e tarano warno an Uhelañ,
An Aotrou a varno betek harzoù pellañ an douar.

Reiñ a ray galloudegezh d'e Roue
Reiñ a raio nerzh da gorn e Olevad.

Klod d'an Tad ...

Antif. 4 - Va holl enebourion o deus klêvet komz eus va
gwalleurioù, Aotrou; levenez o deus bet, dre m'hoc'h eus graet se.

Antif. 5 - Rentit justis, va Aotrou, d'ar re a c'houzañv enep-gwir,
ha distrujit hent ar bec'herion.

Pennadig, Meulgan ha Gwerzad amzer ar Basion

Antif. da Gantik Zakaria - Simon, kousket a rez? N'hoc'h eus ket
gallet beilhañ ganin e-pad un eurvezh?

Kenbedenn - Doue helle'halloudek, roñt dimp hag a zo gwakket dibaouez
en abeg d'hon dirollerezh, ma vimp dieubet dre Basion ho Mab unel,
eñ hag a vev hag a ren Doue geneoc'h en unander ar Spered Glan a
gantvedoù da gantvedoù. R/ Amen.

D'AN EURIOU BIHAN - Antifonenoù ar Meuleudioù.

Pennadig hag Emrespont-berr amzer ar Basion

D'AR GOUBEROU

Antifonenoù ha psalmoù an deiz

Pennadig, Meulgan ha Gwerzad amzer ar Basion

Antif. da Gantik Maria - Ur vatezh + a lavaras da Bêr : Ya, te 'zo
eus o bandenn, rak da zoare-komz a ziskler mat ac'henout.

Kenbedenn - Faelit ur sell a drugarez ouzh ho tiegezh, Aotrou, en
deus eviti, hon Aotrou Jezuz Krist, en em roet dizamant etre daouarn
ar fallagred ha gouzañvet bourreviadur ar Groaz, eñ a vev hag a ren
Doue geneoc'h ...

